

D'an 19 a viz Ebrel

- Er I^{añ} kantved, merzherenti **sant Timon**, diagon.
Edo eus strollad ar seizh diagon kentañ bet dibabet gant an Ebestel e avielas rannvro Korintoz lec'h ma voe kroazstaget.
- E 250, e Kartaga, da vare heskinadeg Decius, merzherenti **sant Mappalig**, a-gevret gant **ar sent Bassus, Fortunion, Paol, Viktorin, Viktor, Heremius, Donat, Firmus, Venustus, Fructus, Martial**, ar santezed **Ariston, Julia, Fortuna, Credula, Hereda**. Meulet int bet gant sant Kiprian.
- Er IV^{re} kantved, merzherenti **sant Expedit**, ur milour anezhañ a voe dibennet en abeg d'e feiz.
- Er IV^{re} kantved, **sant Caius hag e geneiled**, merzherion en Armenia.
- E 1012, merzherenti **sant Elphegius**, arc'heskob Kêrgent lazhet gant an Daniz.
- E 1054, e Roma, **sant Leon IX**, pab.
Genidik a Vro-Elzas e voe eskob Toul e-korf 25 bloaz a-raok bezañ diuzet da bab. E-doug pemp bloavezh warn-ugent e babelezh e strivas evit adreizhañ buhez ar gloer hag e stourmas enep ar simoniezh. Hogen ne c'hellas ket mirout ouzh an disrog etre ar Sav-Heol hag ar C'Huzh-Heol.
- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Jestin pe Yestin** (Lt. Iustinus), penitiour ha beleg norzvreizhat (bro-Skos diwezhatoc'h).
Ur peniti en devoa e skolva Plistin e Bro-Dreger. Keneil sant Eflamm e oa.
- E Breizh, e 1790, distro da Zoue ene **an Tad Julien Jean Baptiste Poussin Despréaux**, jezuist.
Ganet e parrez Ar Sal e Bro-Roazhon e reas kalz a vad e Naoned lec'h ma varvas evel ur sant.
- E Breizh, e 1945, merzherenti **ar gwenvidig Marsel Kallo (Marcel Callo)**.
Ganet e Rozon (Redon), ezel eus luskad ar Yaouankizoù Oberour Kristen (JOC), a voe harzet gant an Nazied en abeg d'e oberiantiz kristen ha kaset da gamp-bac'h Mauthausen en Aostria lec'h ma varvas.

D'an 20 a viz Ebrel

- War-dro 117, e Roma, merzherenti **ar sent Sulpisius ha Servitianus**.
Gounezet d'ar feiz dre berzh Flavia Domitilla e nac'hjont azeuliñ an doueed hag e voent dibennet da vare an impalaer Trajan. Sebeliet e voent en eil miler ar *Via Latina*.
- E 166, e Roma, merzherenti **sant Anised** (Lt Anicetus), pab.
Gweladennet e voe gant sant Polikarp a c'houlennas e vefe lidet gouel Pask d'an hevelep deiz hag er Reter.
- War-dro 374, distro da Zoue ene **sant Marsellin** (Lt Marcellinus), eskob kentañ Embrun e Provañs.
Degouezhet e Roma gant e geneiled sant Dominus (Domnin) ha sant Visant war un dro gant eskibion hanternoz Afrika galvet e 313 d'ar senez evit barn an Donatisted, e voent kaset da giminiadiñ gant ar pab sant Melkiad. Ur wezh dilestret e Nisa e Liguria ez ejont da brezeg en Alpoù betek Vercelli lec'h ma voe eskobet Marsellin gant sant Euzeb.

- E 1120, e Fomperron e bro-bPiktavia, **ar gwenvidig Gerald ar Sal** (e Galleg Geraud pe Giraud), mab Foulques, aotrou ar Sal nepell diouzh Sarlat e Perigord, diskibl Vital a Vortain ha Roperzh Ervrezhel, diazeour abatioù Absia (Absie), Bournet hag hini ar Châtelliers lec'h ma varvas.

- E 1158, **ar wenvidigez Oda** (Gl. Odette), leanez er Brabant. Ganet eus un tiegezh brientinion e nac'has betek penn an eured spletus aozet gant he zud evit en em ouestlañ d'ar C'hrist hepken.

- E 1317, e Bro-dToskana, ganedigezh en neñvoù **santez Oanez a vMontepulciano**, gwerc'hez. Kerkent hag he nav bloaz e wiskas sae ar gwerc'hez emouestlet. D'he femzek bloaz e voe anvet, daoust dezhi, superioez manati Procena ha tostik goude e savas ur manati en he bro dindan Reolenn sant Dominig. Meulet e voe gant santez Katell a Sienna.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Serv**, breur sant Pereg ha sant Konlae.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Bugi**, mab ar roue kembreat Gwynllyw Filwr, breur da sant Kadoù ha tad sant Beuno.

- E 689, **sant Kadwalon a Gembre**, roue.

Hag eñ pennhêr roue Wessex e voe harluet hag e teuas en-dro da c'hounid ar gador-veur a oa dezhañ. Brasaat a reas e zachenn o lazhadegiñ annezidi enezenn Wight a-benn staliañ e bobl eno. Kanttroet gant sant Wilfrid goude bezañ bet gloazet e tilezas e garg hag ez eas da Roma o lezel ar rouantelezh gant e vab Kezwal a voe santelezhzet ivez. Badezet gant ar pab sant Serj dindan anv Pêr, e varvas dek devezh goude, hag eñ gwisket c'hoazh gant sae ar vadeziant, hag e voe sebeliet e kev-iliz Sant-Pêr er Vatikano.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Kezwal**, mab ar roue sant Kadwalon, marvet e 689, tregontet a-boan, goude ur ren berr.

- En Iwerzhon, e 720, **sant Sinneg**, manac'h.

- En Iwerzhon, e 1585 e Cloyne, merzherenti **ar gwenvidig Maoris McKenraghty**, beleg. Goude daou vloaz er c'harc'har, dre ma nac'he anavezout aotrouniezh ar rouanez Elizabet I^{añ} war an dachenn speredel e voe droukroet da voureviadur ar groug.

- E Breizh, e 1687, e Serval e Bro-Dreger, **Mari Guyon**, kevrinourez ar Pemp Gouli. Matezh an Aotrou Maoris Ar Gall a Gerdu, e varvas gant c'hwezh ar santelezh warni d'an oad a vloaz ha daou-ugent. Douaret e voe d'an 21 a viz Mae hag he c'halon bet lakaet e chapel ar Pemp Gouli en iliz Serval.

D'an 21 a viz Ebrel

- War-dro 186, e Roma, merzherenti **sant Apollonius**.

Hag eñ patrikian roman ha desket meurbet e rankas displegañ abegoù e feiz dirak ar senedourion hag e voe kondaonet d'ar marv.

- E 1109, **sant Anselm**, eskob Kêrgent, doazhour eus an Iliz.

Genidik a Vro-bPiemont ez eas da vanac'h en abati Bec-Hélouin e Normandia a oa brudet he skol renet gant Lanfranc hag e voe anvet abad. Kelenn a reas d'e vreudeur mont war-raok war hent ar santelezh dre enklask meizañ gwelloc'h ar feiz. Anvet eskog Kêrgent e Bro-Saoz e rankas stourm

evit difenn frankiz an Iliz kement ma voe harluet meur a-wezh. Mervel a reas en e iliz avat d'ur Merc'her Santel.

- E Kembre, er VII^{vet} kantved **sant Beuno pe Beunino**, abad, beleg.

Ganet e Powys e Bro-Gembr e savas manati Lanfeuno ; mab Bugi ha Berenn pe Perverenn. Eontr santez Gwenvred e oa.

- E 722, e hanternoz enezenn Vreizh, **sant Maelruva pe Maelrub**.

Da gentañ manac'h e Bangor en Iwerzhon, dindan sant Koulmkell e savas e hanternoz Breizh abati A' Chomraich hag e skignas sklêrijenn ar feiz a-hed hanter kant vloaz eno.

D'an 22 a viz Ebrel

- E 175, e Roma, merzherenti **sant Soter**, pab.

Ganet e Fondi e Campania, e voe an daouzekvet pab, diuzet e 166. Deiziadañ a reas ar Pask d'ar Sul goude ar pevarzek deiz eus Nisan. Skrivañ a reas ul lizher d'ar Gorintiz o tiskouez damant Iliz Roma. Merzheriet e voe da vare Marcus Aurelius ha beziet e bered Sant-Kalist.

- E 177, e Lugdunon (Lyon), merzherenti ar sent **Aleksañdr hag Epidod**.

Lezet a-gostez da vare an heskinadeg en doa sammet an eskob sant Potin ha 48 merzher er bloavezh kent, e voe harzet an daou gristen yaouank-mañ. Aleksañdr a voe kroazstaget hag e vignon Epidod a voe dibennet goude bezañ bet jahinet war ar marc'h-koad.

- E 296, e Roma, merzherenti **sant Kaius**, pab.

Hag eñ genidik eus Dalmasia ha kar da zDiocletianus e voe diuzet e 283. O tec'hout rak heskinadeg Diocletianus e vevas eizh bloaz repuget en ur mougev. Dibennet e vije bet war urzh an impalaer Maximianus war un dro gant e vreur Gabinus, tad santez Suzanna. Beziet e voe e bered Sant-Kalist.

- E 536, distro da Zoue ene **sant Agapit I^{añ}**, pab.

Genidik eus Roma, ne badas e babelezh nemet ur bloavezh. Stourm a reas a-enep Eutiches a oa tost e gelennadurezh diouzh hini Nestorius. Strivañ a reas evit ma voe diuzet ar pab e pep frankiz. Aet da gaout an impalaer e Kêrgustentin a-berzh Teodorig roue ar C'hoted e urzhias Mena eskob hag e varvas eno.

- E 613, **sant Teodor**, eskob. Brudañ a reas kalz an deoliezh da sant Jord a voe e hanterour e-pad e vuhez vanac'h hag e-kerzh e eskobiezh.

Ganet eo eus unanidigezh ur c'hefridier impalaerel hag ur c'hast e Sikeon e Galatia e krogas kerkent hag e bemzek vloaz gant ur vuhez penitiour e-kichen chapel sant Jord. Mont a reas da birc'hirinañ da Jeruzalem hag e wiskas ar sae vanac'h e manati Choziba. Distro d'e vro e stagas gant ur vuhez a binijenn strizh. Anvet enep dezhañ eskob Ankir (hiziv Ankara) e klaskas kuitaat ar garg m'en em gave dizellezek anezhi hag e varvas e-kichen henaour Kêrgustentin.

- E 770, **santez Opportuna**, abadez Monasteriolum e eskobiezh Seez (Sées) e Normandia.

Merc'h kont Oxma (Exmes), gwezhall kêrbenn meuriad kelt an Esviz, e oa c'hoar gevell sant Godegrand eskob Seez.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Konvarc'h**, abad hag eskob, diazezour manati Llangynfarch.

D'an 23 a viz Ebrel

- E 303, e Lod (Diospolys pe Lydda) e Palestina, merzherenti **sant Jord**, brudet a-drugarez d'e vojenn varzhus ha en abeg d'e vurzhudoù en em astennas e gehelerezh koulz er Reter hag er C'hornôg.

An impalaer Kustentin a lakaas da sevel un iliz en enor dezhañ e Kêrgustentin. Sant Teodor a voe deol meurbet en e geñver.

- E 997, e-kichen Gdansk e Polonia, merzherenti **sant Adalberzh**, eskob Praga, abostolour ar Slaved.

- En Iwerzhon, war-dro ar bloaz a c'hras 500, **sant Ivar**, **abad**, abostolour ar feiz.

Hervez lod e vije bet eskobet gant sant Padrig hag hervez re all e vije bet eskobet e Roma. Diazezañ a reas manati BeGlery war enezenn Beg Eire, hiziv e kontelezh Wexford. Lodennañ a reas e amzer etre an arvesterezh en e vanati hag ar gefridi gant e niz sant Abban.

D'ar 24 a viz Ebrel

- En VII^{vet} kantved, distro da zoue ene **sant Autharius**, kont frankat ar Villa Vulciacum hiziv Ussy-sur-Marne e koadier Brigia Sylva hiziv ar *Brie*, kantroet gant sant Koulman.

Amazhour meur ar roue Klotar II e oa pa roas degemer da sant Koulman a drememenas ar goañvez 610-611 en e di. Kantroet e voe an tiegezh a-bezh a skoazellas diorreadur ar vanac'helezh koulmanat. Autharius gant a wreg Aiga a ziazezas ur manati war o douaroù, hag o zri mab a zo anavezet mat : sant Adon, diazezeur abati daouel Jouarre e 630, Dadon anavezet dindan an anv a sant Ouen, diazezeur abati Rebais e 637, ha sant Radon, diazezeur manati Radolium, hiziv Reuil-en-Brie.

- E 709, **sant Wilfrid**, eskob Evrog e Norzumbria.

D'ur mare ma oa rannet an iliz etre ar Vretoned hag ar Saksoned ez eas da vanac'h e Lindisfarn hag e kendalc'has gant e studioù e Kêrgent. Ambrougañ a reas sant Benead Biskop betek Roma. O tistreiñ e tiazezas abati Ripon. Anvet eskob Evrog en devoe da dalañ ouzh kalz a eneberezh. Bez' e rankas meur a-wezh lezel e garg da re all. Goude 45 bloaz a eskobelezh e varvas e manati Oundle hag e voe sebeliet en hini Ripon en doa diazezet.

- E 994, **sant Jerar** (Gl. Gérard), eskob Toul.

Hag eñ ganet e Kolun e 930 e warlerc'hias sant Gauzelin war sez Toul e 963. Strivañ a reas da sevel skolioù hag ospitalioù en e eskobiezh.

- E 1103, **sant Gwilherm Firmat**, penitiour.

Genidik eus Teurgn e voe beleget eno. Mont a reas da benitiour e koadegoù ar *pago Celmanico* eleze er Maine, ha diwezhatoc'h e Breizh e Bazeleg-an-Dezerzh e Bro Roazhon. En em staliañ a reas e Dompierre e Mantilly, war harzoù eskobiezh Avranches lec'h ma savas ur chapel. Aet da birc'hrinañ d'an Douar Santel e voe toulbac'het hag e tremenas pell amzer a-raok dezhañ gallout distreiñ da vMantilly. Eno e teue tud niverus d'e gaout ha en em stollas diskibled. Beziat e voe en iliz-chalonied Saint-Evroult Mortain hag ez eo paeron ar gêr ha gwarezeur ar brizonidi.

- E 1622, merzherenti **sant Fidelius a Sigmaringen**, beleg.

Ganet e Sigmaringen e voe Marc Roy breutaer e Colmar kent mont da lean kabusin e Friburg lec'h ma voe roet dezhañ an anv a Fidelius. Hag eñ o ren ur vuhez rust a bedenn hag a binijenn strizh e voe kaset davet er C'hrizoned e Suis evit kreñvaat ar feiz katolik taget gant ar Brotestantiezh. Goude misionoù poblek niverus e voe lazhet e Scewis e 1622 gant ur strollad soudarded varanek.

- E 1868, distro da Zoue ene **santez Marie-Euphrasie Pelletier**, diazevourez leanezed ar Pastor Mat en Anjev.
- E Breizh, e Dinan, e 1914, ganedigezh en neñvoù **sant Benead Menni**, beleg, diazezour C'Hoarezed Klačvdiel Kalon-Sakr Jezuz.
- Er V^{vet} kantved, **sant Devnan**, mab an tiern Brec'han, a savas un iliz war enez Von.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Ivo**, eskob eus Persia a zeuas da avielañ Breizh-Veur.
- En Iwerzhon, e 704, **sant Flanne**, abad Armagh.
- En enez Iona e Bro-Skos, e 729, **sant Egbert**, beleg ha feizvonnour.
Da gentañ manac'h e Lindisfarn e avielas paganed Bro-Friz hag ar Saksoned. Pa oa war an oad, en em dennas en enez Iona hag e reas e seizh gwellañ evit lakaat ar Gelted da zegemer an doare roman da jediñ deiziad Pask. Kas a reas sant Willibrord da avielañ Bro-Friz.
- E Bro-Skos c'hoazh e 896, **sant Flamm**, abad enez Iona.

D'ar 25 a viz Ebrel

- War-dro ar bloaz a c'hras 68, en Aleksandria, merzherenti **sant Mark**, Avielour. Gant sant Paol ha sant Barnabaz e genderv e kemeras perzh en avielerezh Enez-gKiprios, ha goude-se e skoazellas Abostol ar broadoù pa voe toullbac'het e Roma. An testenioù koshañ a ro da anaout e voe danevellour katekizerezh sant Pêr e Roma ha diazezour Iliz Aleksandria e Bro-Egipt. E relegoù a voe degaset da Venezia en navet kantved.
- En Iwerzhon, war-dro 518, distro da Zoue ene **sant MacCaille**, eskob Cnoc Cruacháin, niz sant Padrig. Paeron enez Vanav.
Skorañ a reas sant Mel da-geñver gouestloù santez Berc'hed.
- En Iwerzhon, VI^{vet} kantved, **sant Cannech (Kanis) Cill Cainnigh**, beleg.
- En Iwerzhon, war-dro 780, **santez Mella**, intañvez, abadez.
Bevañ a reas e Connaught (Connacht) ha goude marv he gwaz ez eas da leanez en abati Doire Melle, war ribl al Lough Melvyn e kontelezh Leitrim, a oa bet savet gant sant Tigernach.
- Tremenvan sant Gurloez a vez lidet d'ar 25 a viz Eost, moarvat deiz treuzlec'h e relegoù.

